

KIS-476 – Gl. *plaine, plateau, pénéplaine, épicentre*

(MME da GE – 12 09 95)

Emaon o labourat war ul levr *Douaroniezh Breizh* hag ober a ran gant kentelioù Don SADED hag ar gerva a voe savet gant GC.

Gwelet em eus ho poa dibabet ober gant :

kompezenn "plaine"
uhelgompezenn "plateau"
argompezenn "pénéplaine".

Met n'o poa kinniget netra evit "haut plateau", hag ar ger *uhelgompezenn*, abalamour d'an ag. *uhel*, a vez techet an dud d'e dreuskompren.

Hag un diskoulm a zo ?

G.S. : Petra a rit eus *épicentre* ur c'hren-douar ?

(GE da MME – 14 09 95)

Ya, a-wechoù ne grede ket SADED disteurel termenoù 'zo bet savet gant VALLEE hag int strobellus evel ar re a venegez.

N'omp ket evit dilezel Br. *kompezenn*, gwriziennet mat er yezh ha savet mat a-du-rall. N'omp ket endalc'het avat da zeverañ diwarnañ ar c'hevatal da Gl. *plateau*. N'eo ket ar c'hedrannoù a vank evit dec'heriañ an daou geal entalet gant an termen, eleze "uhel" ha "kompez" ; ober a ra ar c'hembraeg gant an termenoù *llwyfandir* "savenn dir" ha *tirfwrdd* plaket diwar Sz. *tableland* — met ne ve ket mat mont da heul ha pa ve hepken peogwir emañ ar gedrann *-tir-* enno (evel *land* er ger saoznek) ha gwell pa c'haller na zaveiñ re da geal boutinañ ar sterva (" ar *c'hlañvour* kaset d'ar *c'hlañvdi*, h.a. "). Hep mont re bell diouzh ar yezh ordinal e kinnigfen a-walc'h ur Br. **krec'hdaol** b., a c'hallfed devesañ diwarnañ Br. **krec'hdaol uhel, uhelgrec'hdaol**. Soñjet 'm eus ivez e Br. *krec'hgompezenn*, met hiroc'h eo hag, ouzhpenn se, kemmoù

zo en tu all d'an diforc'h uhelder etre ur gompezenn hag un “uhelgompezenn”. Ne ginnigan ket kennebeut *krec'hdaolenn* pa ranker diwall diouzh ar geriadoù lostennek a groge da vordilhañ er yezh dindan levezon VALLEE. A-gostez 'm eus lezet ar c'hedrannoù brezhonek all o tougen ar c'heal "uhel" : *aot/d, arzh, bann, barr, gour-* (kv. Kb. *gorthir*), *kern*, h.a. peogwir ez eus gant pep hini er yezh arnevez un durc'hadur ster re bell diouzh ar ster a glaskomp ha dreist-holl pa na zere ket rekouriñ da gedrannoù divoas evit sevel termenoù eus ar yezh voutin.

Emañ Gl. *épcentre* kevenebet ouzh Gl. *hypocentre* : hemañ o vezañ kreizenn werc'hel an douargren, loet lies kilometr dindan gorre an douar, hennezh o vezañ bannad mentoniel hemañ war ar gorre. Ober a rafen Br. **gorregreizenn** evit an eil, Br. **dongreizenn** (pe **dangreizenn**) evit egile.